

KANAÑ !

Diwar Tryo, albom "Vent debout" (2016)
Bet lakaet e brezhoneg
gant skolidi skol Diwan Karaez (2017)

Poz 1

Aze 'mañ, o treiñ en-dro deomp !
Ha pa 'welomp ket, bemdez e klevomp :
un diskan bihan, pennad hent bihan,
un trouz er pelloù, a ra dimp mil vad !
Ret 'teufe 'maez gant hor mouezhioù.
Ha notennoù. Ha dibaboù.
Gant ar garantez er pezh a reomp.
Gant ar fent ivez. Er galon gwirionez.

Diskan 1

*Kanañ, zo dieub a wirioù ha soñjoù !
Ur predig bihan 'ra d'an amzer dihan.*

Poz 2

Aze ! Evel un ezhomm
'beg e vizied. E kreiz hon daouarn.
Choaz ar gerioù. Lakaat 'nezhe un' hag un'.
Mont uheloc'h dreist d'an dislavarioù !
Ober vad deomp. Dre ar melodi.
Kroazañ an hentoù, tempo, armonioù...
Aze, ennomp 'mañ, aze, war hon lerc'h !
D'an emgav emañ. E kroashent ar vuhez.

Diskan 2

*Kanañ, zo dieub a wirioù ha soñjoù !
Ur predig bihan 'ra d'an amzer dihan.*

Poz 3

Aze, en amzerioù glav.
Tud foll gant Doue 'n em lazh dirazomp.
'Vel un analadenn. 'Vel ur c'hwezhadenn.
'Vel un tres kreion. Un ehan en ifern.
Aze. Ouzhpenn kanaouennoù.
'Vit derc'hel da grediñ hep koll hon hunvreoù !
'Vel-se emañ. Ezhomm hon eus eus se.
Evit chom ganit-te. Evit santout omp tud.

Diskan 3

*Kanañ zo dieub a wirioù ha soñjoù !
Gwir barrad avel a ziskouez dimp omp bev !*

Poz 4

Aze. Da virviken.
An teir mouezh eo. Ar muzik tro-dro.
Ha setu ni. 'Maomp holl asambles.
'Maomp a unvouezh. Hag ar bed a-gevred !
Se 'eo : ret eo deomp bout klevet.
Ar choaz 'meump-ni graet da ganañ a-gevred !
Ha c'hoazh e vo graet. Dre se unanet.
Er peoc'h, ya se 'eo... Bloavezhioù zo dija !

Diskan 4

*Kanañ zo dieub a wirioù ha soñjoù !
Meur a vouezh o vont. Unaniñ.
Bep beure pa zihuner ha bemnoz pa gousker.
Kanañ.*